



CANTIC DEVOT

d'ar VERC'HES.

I.

SANTES Mari, Mam Doue,
E peb amser Guerc'hes,
Jesus a so va Roue,
Ha c'hui va Rouanes;
Evel ma zeo va Barner,
Bezit va Fatrones,
Hac evidon dirazàn,
Bezit Advocades.

2.

Etouez ho { Servicheres
 { Servicherien
Pliget ganeoc'h va receo.
Meurbet eo douç ho servich,
Servich ar bed c'huego ;

Rac-se hoc'h abandouni,
Quitaat ho preuries
A ve redec gant malheur
D'en em goll da jamæs.

3.

Eus va fers e promettàn
Ne rin, ne leverin
Netra a enep d'hoc'h enor;
Biquen na bermettin
Na ve den sujet dime
Quen hardis, quen ingrat
Da offansi Mam Jesus,
Ur Vam quen douç, quer mat.

4.

Evit gallout enori
An hano a zouguet
A vam a visericord,
Guir Vam Salver ar bet;
Me a bromet soulagi
Ar beorien affliget,
Dre ma zint oll ar memprou
Eus ho Map binniguët.

Epad va buhez, em œuvrou.
 Va sicouret bebret;
 Dreist pep tra, var va maro
 N'em abandonnit quet.
 Dre ho taouarn d'am Salver
 Presantit va ene;
 Sur e zin d'ar Barados
 Var ho l'erc'h goudese.

FIN.